

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

86. BERJEREN AC ER MARKIS KOATTREDREZ

(follennoù 255 - 256)

Pa voa ar verjerenik el lan gant e denvet
 Daou zen chentil iaouank en deus bet rankontret

- N'an Doue, berjerenik, n'an Doue lavarit din a c'houi
 eun neubeudig arc'hant a zo aman gane ? a komerfe

- Sallokras, den chentil, mar deo gwir a leveret
 Ma na c'heus c'houi arc'hant evel ma leveret
 Kassit-ti ganec'h dar ger evid reï do priet

- En an Doue, berjeren, nam Doue larit din
 a c'houi a kemerfe
 eun tam lien batist a zo aman gane.

- eun habid lien leïen ag a ve goalc'het guen
 A zo madik avoalc'h evid eur verjeren.

Me a vel an eol, an eol izel dija
 Ma no c'heus pel da vond e ze mall deoc'h asta.

- No neus ket hiroc'h da vond evid ker ar radennek
 Mar kerit, berjeren, dont ganem da vellet.

Ni o kreïo mestrez var pem kant skoët leve.

- Neket va c'halite beza c'halvet itron
 beza berjelenik e va kondition.

- Neket e ti o tad e ribotad al lez
 O c'heus disket parlant er gis-se, va mestres.

- Er sall e ti va zad e diskours an noblans
 Ag e hober ar bal ag aliez an dans.

- En an Doue, berjelen, en an Doue larit din
 a ne anavezit ket
 An duð chentil e pere (eo to) e parlantet.

- Seblantout a ra din er vez ma o koëllan
 An otro Koattredre a baron Kernivan.

vvvvv

Jannet Puill, 9 févr. 1851

(Kement-mañ a zo hep mar, un tamm eus Ittron ar Faouet)